

## 02 A pa sav an avel


Poziù ha ton : Jorj BELZ

Hanter-dro

♩ = 96



A pa sav an a - vel àr hor bro Breizh - I - zel A pa sav an a - vel àr hor bro Breizh - I - zel



A pa sav an a - vel àr hor bro Breizh - I - zel E soñj ar Vre - to - ned en o mar - to - lo - ded.

- 1 - A pa sav an avel àr hor bro Breizh-Izel  
E soñj ar Vretoned en o martoloded.
- 2 - Lod anezhe zo chomet àr ar mor kounnaret  
Hep gellet lâret ger, skrapet d'ar gwallamzer.
- 3 - Bagoù pesketourion, dalc'hmat àr ar mor don  
Aze 'mañ o micher, talañ doc'h an dañjer.
- 4 - Pa ve(z)ont g(ant) o labour garv, 'welont bagoù ar marv  
O paseñ e-tal de(zhe), leun o bou(z)elloù gete.
- 5 - Batimantoù spontus karg a aour prizius ;  
Karget 've(z)ont a aour du a gasont da bep tu.
- 6 - Àr ar mor bras diroll, karget e ve(z)ont a betrol,  
Mand a ar vag da goll, 'vez kousiet an holl.
- 7 - Pa vo goloet an aod get libouz ar pitaod,  
E vo re ziwe(z)hat, n'hellimp ket mui netra.
- 8 - Mammoù ar goueleni, pa vint en angoni  
An serrourion argant, 're-se 'n em denno buan !

Ambitus

